

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

## 91. MEULEUDI AR C'HI

Ar c'hi e penn ar holl loened  
 en deuz ato baleet;  
 aliez e bet anvet  
 Roue ann holl anevaled  
 oc'h-penn kant ac'hanomp-ni  
 n'ho deuz ket spered ar c'hi.

Gwechall pa oa ar rouaned  
 Labourerien douar,  
 ho flijadur hag ho gloar  
 a glaskent o vesa denved;  
 Da vevel braz enn ho zi  
 e kemerent eur mell-ki.

Ar mevel braz enn hon amzer  
 e tiez ar rouaned,  
 en deuz, gwir eo, kalz spered;  
 Lealded eo a c'houlenner:  
 Poan vraz em be ho kredi  
 e ve kel leal ha ki.

Ar c'hi a ra meur a vicher  
 Dre garantez 'vit ann den :  
 Beilla a ra d'he zifenn,  
 hen heul a ra peb amzer;  
 'Liez hor bugale-ni  
 n'hor c'haront ket koulz ha ki.

pa vouelann, e vouel he lagad;  
 pa c'hoarzann, e fich he lost;  
 pa'm euz aon e choum a dost;  
 pa'z ann da vale ec'h ebad;  
 da glask eunn dra a-zevri  
 Piou a zo ker koulz ha ki ?

Enn deiz all iann ar riboter  
 a choumaz gant he govad,  
 hed he gorf enn eur stread,  
 Tro-war-dro Iann geaz a glasker,

Azor araok pep-hini  
her c'havaz gant bek he fri.

War he veno, Fanch Burzudo  
a zo eunn tenner dispar,  
Beb tenn-fuzul e tiskar  
eur gwenneli : piou her c'hredo ?  
Mar tebr gedon, klujiri,  
e lavar bennoz d'he gi.

Eunn demezel euz ar vrava  
Skubet gant ann avel foll  
enn deiz all a ie da goll  
ebarz e ster Lokmaria :  
Fox a bakaz anez-hi :  
Piou a neun evel ar c'hi ?

Pipi mondian a Dreger  
a ie etrezek Paris  
aour gant han enn he c'houriz,  
War ann hent-braz e kav eul laer :  
his ! pill ! Turk, eme bipi,  
ialc'h, buez a dle d'he gi.

eunn nozvez e oamp holl kousket  
pa glaskaz iann Lazenner  
digeri prenest va c'her;  
prestig e oue dialbennet:  
Chilp, a-ziabarz ann ti  
a grogaz e bek he fri.

Eur c'hi mad a zo e peb bro  
gwel eget kalz mignoned,  
pa'z eomp da glask hor boed,  
ar re man a ia enn ho zro  
ha ne veler neuze mui  
nemet Sant Rok hag he gi.

Eunn tad eur vamm a zaelaoue  
ho c'hortoz ho bugel ker,  
a oa eat emeaz ar ger  
Da glask he vad hervez Doue :  
Tavit, Tobi, e ma tost  
erru he gi fich-he-lost.

ann erc'h a gwez a dorchadou  
 ar goan zo kris ha garo ;  
 ann tremeniad skuiz maro  
 a zempl : klevit he hirvoudou ;  
 piou a red d'hen repui ?  
 eur manac'h paour hag he gi.

ann den a goll ar sklerijenn  
 hag a renk klask he vara,  
 piou a gavo d'her rena  
 e kreiz ker braz tevalijen ?  
 Piou her bleino 'zor da zor  
 he gi, he vignon Azor.

ar paour Lazar den reuzeudik  
 n'hen deuz na ti na bara  
 gant ann naon reudi a ra  
 kichen dor ar falz-pinvidik.  
 piou a lipo he c'houli ?  
 Teod karantezus ar c'hi.

ar c'hi, red eo hel lavaret,  
 ne ket servicher hep-ken,  
 Rag evit plijout d'ann den  
 e varvfe kant gwech ma ve ret;  
 kalon gwel n'ez euz hini  
 gwel eget kalon ar c'hi.

vvvvvv

( Moulet eo bet ar son-mañ war follennoù-nij, evel  
 m'hen diskouez Catalogue bibliographique de la chan-  
 son populaire bretonne gant Jozeb Ollivier, dindan  
 an niverenn 888 :

- Meuleudi ar C'hi. War don gwerc'h Fualdès. 16 c.  
 de 6 v. de 8 ou 7 p.; à la fin : Ann Aotrou A. (Alex-  
 andre). - in 8°; 4 p.; Kemper, Moulet gant E. Blot,  
 mab.

Diwarbenn an ao. Chaloni Yann-Frañsez Aleksandr,  
 sellout Abeozen, Istor lennegezh vrezhonek an amzer  
 vremañ, p.77, niv. 105. )